

# PERINAIG HAG HE FOUDAD LEAZ

WAR DON : *Petra zo nevez e kear Iz* 66

## I.

Perinaïk, ar plac'h lirin,  
A gerze skanv da Werliskin,  
Eur poudad leaz sont war he fenn,  
Diazeet war eunn dorchén.

Lakeed e doa eur c'hoef gwenn-kan,  
Boto neve ha loero moan,  
He bleo rannet, flouret giz ker,  
Evel diou lipaden onner.

Klouar ann deiz. hag ann heol splan,  
Ar strouez (1) karged a richan.  
Brao eo bewan ho ma Doue !  
Perin oa ked he fenn gant-se.

Kleved ar plac'h o kromolad :  
« Ma leaz, hep-mar, vo gwerzed mad,  
» Teir douzen uo neuze breninn  
» Dindan ma ier ho lakainn.

» Me mo tri c'hrodad ier munud  
» Goaskedet kloz barz enn ho c'hud ;  
» Gwall lemm e vo fri Alanik (2)  
» Ma ne lez d'in gwerz eur wizik.

» Ma gwiz, pa vo braz, a voc'ho ;  
» Savet ma moc'h, me ho gwerzo,  
» Gand ar priz 'mo daou loue kaer,  
» Marteze, zoken, eunn onner.

» Sétu d'in leaz a leiz ar pod,  
» Amann melen leiz er ribod,  
» Ma ialc'h a bonnera bemde,  
» Me vo eur baborez neuze !

» Pented evel eur benn-herez,  
» Ar faroded raï d'in al lez...  
» Pipi, ma c'hoant, vo ma fried,  
» Jabadao ! neuze vo danset ! »

— Ober a ra eul lamm danvad,  
Patatra ! grilled ar poudad !  
Keno uo, moc'h, krodad, onner,  
Ha keno, siouaz, ! Pipi gouer !

Ar poud a zo grizilloned,  
Hag al leaz er bouldren skuilled.  
Perinaïg a skuill daelo.  
Ar c'hi a lip he vuzello.

## II.

Perinaïk deuz huvreet,  
Kreiz he huvre eo difunet.  
— Piou na huvre ked er bed-man ?  
Ar furan koulz hag ar zotan.

Ar paour a huvre er mado,  
Ar pinvidig enn enorio,  
Ar c'hlanvour a huvre iec'hed ;  
Ann Ankou ho difun abred.

(1) *Ar strouez*, pe ar *c'harz*, les luissons.

(2) Alanik (le renard).

La fable ci-dessus est tirée de *Bombard Kerné, Jabadao ha kaniri*, poésies bretonnes de M. Prosper Proux. *Bombard Kerné* est une jolie brochure qu'on peut acheter pour quelques sous à la librairie Eveillard et Brébant, à Guingamp.